

(440, suite)

## D'ar Brinces

Mari-Clemantin-Carolin-Leopoldin-Clotild d'Orleans,  
gant e fried  
E. A. R. an A. August a Sax-Cobourg-Gotha,  
an 19 eus a vis mae 1843.

(441)

O pequeñ douç e zeo da galon hon Roue  
Guelet e rugale carguet a c'hraç Doue!  
Ni ive, Bretonet, a bartach e joa vras,  
O velet ar bonneur er famill royal c'hoas.  
Ur joa meurbet a rên dre oll ebars e Breiz,  
Ouz ho cuelet, Princes, êruet en hor c'hreiz.  
Clêvet a rên gant joa lavaret a ur vouez;  
Eun eo ar Brinces Clemantin en hon touez!  
Guelet a rimp gant joa merc'h caret hon Roue,  
Hac ar prinç e fried, a drugare Doue!  
Ra riot, ô Princes leun eus a vadelez,  
Carguet a eurustet en ho priedelez.  
Deus a fonç va c'halon e teuân da c'houlen  
Demeus a vadelez ar C'hrouer souveren  
Ma vo ar Prinç August, ho pried, occupet  
Atao eus ho ponneur, ô Princes qer caret!  
O c'houi pehini zo en demeuranç ar gloar,  
Hac hon eus qer caret, pa voac'h var an douar,  
Implorit ganeomp ar Vajeste divin  
Erit bonneur ho c'hoar, ar Brinces Clemantin!  
Majeste souveren! divar a lein ho tron,  
Seuillit, me ho suppli, ho penediction  
Var an union gaer eus an daou bried-mâ,  
Ha ma verint atao contant, eurus ennâ!  
Pellaît diouto an distera chagrin:  
Rentit bepret eurus August ha Clemantin!  
Exaucit o reqet, en eur accordi dê  
Bugale a vezo atao hanval oute.  
Ha ra deujo hirio an Autrou Souveren  
Da deurvezout receo en e c'hraç va feden!

(442)

A. Lédan.

(Vol. VI, p. 440-442.)